

AR ROUE G

AR ROUE GRALON HA KEAR IS

Hag Iiz Mirakulus

ann Itron Varia Rumengol

* Neb a bed Gwer'hez Remengol
* Birviken ne ia da gol...

En Eskopti Kerne lec'h e ma breman
môr Douarnenez, e oa guechall eur gear
vras meurbet hantvel Is.

Eur voger ledan hag huel, gant skloujou houarn, he diffenne deuz ar môr.
Er gear-ze ne vellet, o touez an dud
pinvidik, nemet dirzuz, goal exempl ha
fallagriez Gralon, pehini a chome neuze,
er gear a Is, a oa Roue Breiz-Izel. Bet a
oa brezeller en he iaouankis, ha rust enn
andreed he zujidi ; mes en he gozni,
sklerijennet dre ar feiz kristen, e teus
da veza douz evel enñ oan. Hirvoudi a
rae aliez war dirzouz Is, ha war ar vue
dirollet a rène e werch, ar Brinsez Ahez,
gant an noulan yaouank a gear ha deuz
ar vro hanvet hirio Kear-Ahes, pehini a
oa dezhzi a leve.

En amzer-ze, ive, e oa e Breiz-Izel,
dâou abostol santel, daou vignon da
Zoue, Saint Kaourintin, kenta eskop a
Gemper, ha Sant Gwenole (1), kenta abad a
Landevennek ; aliez o devos pre-
zeget ar feiz er gear a Is, ha gourdrouzet
ar Roue Gralon, abalamour d'ann drougoberou, d'ann torfejou ha
d'an injustisou a ree bemdez, e palès
he werch yaouank ; mes goab a ree
anezho, hag ar Roue, simpleet dre ann
oad n'en devos mui a c'halloud avoalc'h,
evit arreti dizurzou ker bras.

Doue skiuizaz er fin o welet Is kaledet
enp he fec'hejou, hag a roas da ansout
da Ael Breiz-Izel he vigaou Gwenole,
penoz eb dale pell, ar gear gaer-ze a
vije beuzet gant ar môr. Kerkent, Gwenole
a pignas war he warc'h hag a redas
da gear Is, o sonjal c'hoaz mouga koler
Doue. Mes tremenet e oa an amzer a
druez. Pa en em gavas an Abat santel
war dro anter-noz, skluojou Is a oa digor,
hag ar môr a groze spontus, o
firnial war an dud, ann tier hag ar palezioù.
Gwenole ne allaz savet nemet
Gralon epken ; gwelet a rer c'hoaz rou-
dou treid ar march er garek war pehini,
absoue, abaded Landevennek, aragog ke-
mer o ch'arg a deu da ober ho feden ha da
ansout ar Roue gralon evit fondatour eur c'houent.

Ahés merc' fall ar Roue, hiriek a revin Is, oë troet a Mari Morgan, hanter maouez hag hanter pesk. Pa bar
ar loar, e c'blever c'hoaz aliez o kana, war môr Douarnenez, a euz reveniou, ar gear veuzet. He daoulagad a zo
evel diou stereden, ha bleo evel ann aour, he gouzoug hag e diou vronn kea gwenn hag ann erc'h, hag he moez
melioduz a laka da gouskat dre he chaimou ; evelse, martoloded ar vro, rakial ma e c'blevent, a lavar etrezo,
gant spouren : Tec'homp Ahés a zo zavet deus he falez, ar gwall amzer ne ma ket pell, ha ma taleomp e vezimp
tolet kousket var ar rec'hier.


Evel Sodôm, Gômor, ha Babylon, kear Is ne m'a mui ; hag hirio ar môr a ruill dreist e fenn.

Da zao heol, Gralon o veza pignet gant Gwenole var lein Menez-Hom, a daolas achano eur zell truezuz war
lerch' ; mez el lec'h ma edo ar gear Is, ne velas mui nemet môr Douarnenez, hag e kouezaz d'ann daoulin evit
trugarekat Doue hag ar Werch'ez da vez saveteet he vuez.

(1) Gwen-oll-e-oll'se-Gwen, hanvet evel-ze gant e vamm ar santez Ven abalamour ma oa eur bugel koant a fur, Sant
Gwende, dre he vertuziou, en deus méritet an hanou kear Ael Breiz-Izel.

Petra 'zo neve e kear Is
Ma ze ken foll ar iaouankis ?
Ma klevau-me ar biniou,
Ar vombard hag an delennou ?
N'euz e kear Is netra neve,
Ann ebaltou ma ve bembe,

Ha Kear



Braz ive ar bu
andret ar berelin
rouchoudou.


Ar vinoret dile
vartolodet war a
enn danjeriou, c
hag aliés e lever

Moderato

Petra zo neve e kear Is, Maz e ke

JE GRALON

Kear Is



hanter pesk. Pa har
He daoulagad a zo
ere'h, hag he mouez
ont, a laver etrezhou,
ma taleomp e vezimp

a.
eur zell truezux war
z d'ann zaoulin evit


ugel koant a fur, Sant

Brasa burzudou a zo bet
Ebars an amzer dremenet !..

Braz ive ar burzudou a ra c'hoas hirio, ann Itron-Varia-Remengol, enn andret ar Vretoned, ha, dreist-oll, enn andret ar berelinet a deu bemode de gwelet, alies eus a bell bro, ha kalz anez ho diarc'hen hag e korf e rouchoudou.

Ar vinoret dilezet, an intanvezet paour, ar beorien noaz, soudardet Breiz-Izel, e kreis tann ar brezel, ar vartolodet war ar mör bras e furol an holl-dud afflijet a gorf, a galon hag a speret, darn en o foaniou, darn enn danjerrion, darn all en disesper ha darn ive war gwele ar maro, o deus sonjet eus ho Mam' douz a mad, hag alies e leveron dez-hi gant garante ha gant flanz enn he galloud hag enn he madelez.

O Gwer'hez saku Remengol, Patronez Breiz-Izel,
Pedit evidomp, hirio ha pa rankimp mervel :
Pedit evit Briz-Izel, evit ar Vretonnet
O deus ho karet, ha kar bag ho karo beprent.



Pa zavas diwar he zaoulin e velas-dindan ann heol, o lugerni, *Ru-men-Goulou* pe *Men-ru-ar-Goulou*, war pehini vije sakrifiet tud e beo, ha bep mis-eur bugel bihan, c'hosz euz ar vronn, Neuze, beuzet enn he zaelou, hag he zaoulagad savet strezek ann Env, e lavare d'e vignon santel.

* War ar Men-ru-Hont, konsakset da eun Doue barbar, me a rei sevel eun a iliz kaer d'er Werchez, hag el lec'h ma skuiller goad ann dud da Deutatés, o u'skuillo mamm ar gwir Doue he grasou * var Breiz-Izel. *

Gralon a zaic'haz mad d'er t'her, ha beleien ar baianet o veza o en em evolled pa veljont dispen templ an Doue faos Teutatés, ar Roue kristen o ziebas e kever Argol e penn ar Vretouet konvertisset.

Goudé beza great he bedeu, war Menez-Hom, ar roue Gralon a heuillas Gwenole da abati Landevennec savet ganthan ; eun neuheut blaveziou kentoc'h. Diaraog kement-se, en devoa c'hoaz roet he bales, e Kem'er, da Sant Kaourintin, pehini en devoa torret he neon deshan ha de gompagniez gant eun tam deus e besk bihan. E plas ar palés-se e ma breamais ilis kaer katedral Kemper.

Gralon a dremenaz e Landevennek ar rest euz he vuez enn eur binijenn galet, hag alies e kare mont gant he vignon ker da Remengol da bedi evit e bobi, ann Itron-Varia-Remed-Oll, beza eun devoa ann heur d'he gwelet brudet bras e pevar c'horn Breiz-Izel, hag o verval etre divrec'h sant Gwenole, e Landevennek, e rekommende he ene da Zoue enn eur lavaret gant fizians.

Itron-Varia Remengol,
Mirit ouzin na zain da goll.

Pemzek kant vloas a zo abaone ma 'zo maro Gralon, hag ar Vretoned, pere zo bepred tud a feiz hag a galon, o deus c'hoas sonj eus ho roue koz hag eus he vignon, Sant Gwenole, Mes ma ch'hanavent gwelloc'h istor ho bro gaer, pa zeont da zul an drindet da bardon bras Remengol; ha pa veiont mör Douarnenez, Menez-Hom, Landevennek ha tour huel ilis miraculus ann Itron-Varia-Remed-Oll, a lavarfent an daelou, eun ho daoulagad, eun eur vale gant respect War douar ar Zenth ag ar Rouaned.

Mes, rented skanvoc'h eb dale
E sait prim da c'heul Gwenole,
Hag e varc'h, gleb e beder c'har
A lamp deus ar mor en douar.
Breman, ed e Mari-Morgan,
Ahès, deuz skeud al loar a gân,
A gân hag en eur vousc'hoarzin,
A gân ar mât e bleu hâr.

lerc'h ; mez el lec'h ma edo ar gear Is, ne velas mui nemet mór Douarnenez, hag e kouezaz d'ann daoulin evit hag aliés e lev trugarekat Doue hag ar Werc'héz da vez saveteet he vuez.

(1) Gwen-oll-e-oll-se-Gwen, hanvet evel-ze gant e vamm ar santez Ven abalamour ma oa eur bugel koant a fur, Sant Gwenole, dre he vertuiziou, en deus méritet an hano kear Ael Breiz-Izel.

Petra 'zo neve e kear Is
Ma ze ken soll ar iaouankis ?
Ma klevan-me ar biniou,
Ar vombard hag an delennou ?
N'ez e kear Is netra neve,
Ann ebattou ma ve bembe,
N'ez e kear Is nemet traou koz,
Ann ebattou ma ve bemnoz.
Bojennou drez zo divcannet
Ha dor an ilizou prenet,
Ha war ar beorien o wela
Ec'h hisser ar chas dro drailla.
D'ho c'hoezek vla ann oll verc'het
N'ho deuz doue, met ar pec'het
Ha da ober he gurunen,
E roont ho c'haera rosen.
Ahès merc'h ar Roue Gralon,
Tann an ifern en he c'halon,
Er penn kenta deuz an dirol,
A gas d'he c'heul ar gear da goll.
Sant Gwenole, gant kalonad,
Zo bet meur vech e kaout he zad,
Ha gant daelou ann den Doue,
En deuz lavaret d'ar Roue :
— « Gralon. Grajon, laka evez
« D'ann dizurzou a rên Ahès,
« Rag tremenat vo ann amzer
« Pa skulio Doue he goler.
« El lerc'h ma voa c'hoarsadek kent
« E vo neuze skrignadek dent,
« El lec'h ma voa kanaouennou,
« E vo neuze skrijadennou !... »
Hag ar Roue koz spouronet,
He verc'h hen eveuz kelennet ;
Mez diskaret dre ar gozni,
N'ez mui ann nerz da stourm outi.
Ha, skuiz gant rebechou e zad,
Evit mont deuz he zaoulagad,
Hi 'deuz gret gant droug-sperrejou,
Eur palès kaer tost d'ar skuljou.
Eno, gant he amourouchen,
E ma fennoz ann obaden,
Eno aour hag er perles,
Evel ann heol e par Ahès...

II

— « Plijadur dec'h er palès-man,
« Merc'had gentil a potred skan,
« Plijadur dec'h ha nozvez grén ».
Eme eur pinz enn eua antrem.
Ar prinz a zouge dillad ru,
He varo a voa hir a du,
Hag he izili a verve,
Hag he zaoulagad a zeve.
— « Ra viot deut mad, estranjour,
« Eme Ahès gant eur beg flour ;
« Ia, ra viot deut d'ar gwella,
« Mac'h n'hanvét ann traou falla.

Peden ar Roue Gralon

Itron Varia Rumengol
Mirit ouzimp na zaimp da goll ;
Pedit eve ho mab Jesus,
Ma vezimp gant-han evuruz.

Itron Varia Rumengol,
C'houi eo Rouanez ar bed oll,
Pezit hor mamm, hor Patrones
Ha ni ho meulo da james.

Moderato

Pe - tra . zo ne - ve e kear Is , Maz e k
Me kle - vann me ar bi - ni - ou Ar vom - be

— « Neuze m'em bo digemer mad,
« A respontas ann divroad :
« Rag me ar fall zo ken disket
« Hag ann hini neuz en krouet !... »
A kerkent Ahès d'er pedi,
Da ober eun dro zanz gant'hi,
Hag ann oll a eneb Doue,
Gwassa ma c'hallent a doue.
Pa oa d'ann obaden-ze fin,
Danser Ahès, en eur c'hoarzin,
Hag enn eur zevel he ziou skoa,
A lavaras : — « Nouzoc'h netra !... »
« Kerc'hit d'in me deus a gear Is,
« Vesellou santel an ilis
« Kerc'hit kroas ar c'hrussufiet
« Eun hosti sakr, hag e velfet !
Ahès, respontas timad :
— « Kavet uint enn Iliz va zad,
« Rag va zad diot-me a gred
« En trompler-ze a Nazareth !
Tri a redas e ber amzer,
Hag a ziskaras ann Aoter,
Hag an traou sakr a we douget
Etre o daouarn miliget,
Ar Prinz ru, raktal m'ho gwelas,
A greis he galon a c'hoarzaz,
Hag a lavaras c'hoas enn-hann :
— « Plijadur dec'h er palès-man ! »
Da genta a doliou boutou,
E vrujunas ar vesellou,
Goudé flastras ar grussifi,
Hag e krenchas war ann hosti !...
A war-n'he, gant oll e noaz,
En eur gana — « Malloz d'ar groaz ! »
E raz e seiz stum dishenvel,
Dansou ar seiz perc'het marvel !...
Kerkent ar palès a grenas,
Hag ar c'hurunou a strakas,
Hag a d'ezu ho zellou nec'het,
E skoas tan glaz al luc'het.
— « Na c'houi vel, eme ar Prinz ru
« Me laka Doue war e du... »
Ma lavarent oll gant glac'har,
— Ahès e deus kavet e far !...

III

Pa oa fin d'ar sakrilejou,
Messager ann droug sperejou,

Chomet e unan er palez,
A dosteaz da gaout Ahès.
— « Va dousik koant, merc'h [C'hra]
« Ha muia karet va c'halon,
« Ha n'elfent me eneb gis
« Guelet alc'houe skuljou Kear Is
— « Va zad a zoug enn e gerc'he
« Ann alc'houe aour deuz eur chad
« Ha va zad ireman zo kousket,
« Ha kaout an alc'houe n'allan k
Mes hen d'he zreid en em strink
Ha d'he dornik flour a bokaz,
Hag e dallas dre he zellou,
Karget a dàn hag a zaëlou.

IV

Heb goud ar pez a dremene,
Neuze eur pennad ac'hane,
ENN e balès ar Roue koz,
E voa kousket e kreiz ann noz.
Kambr paour Gralon ne voa enn.
Nétra nemet eur grussifi
Deuet a zorn eur mignon ker,
Sant Kaourintin, Eskop Kemper.
Netra nemet eun Aviel,
Roët gant eur manac'h zantel,
Roët dez-hat gant Gwenole,
Evel eur merk a garante.
Kaér enn e gozni vel eun Ael,
E kouske Roue Breiz-Izel.
Hag enn dro d'he dall, e vleo gwe
A re dispak, eur gurunec.
Neuze, Ahès, ar brinsez fall,
Evel pa vije skoët dall,
ENN e gambr, heb aon rag Doue.
A deu da laëres an alc'houe.
ENN eur vale war beg e zroad,
Ar verc'h a dosta skan d'he zad,
A goustadik deuz e gerc'hen,
A denn n'eur c'hoarzin, ar chade

V

Piou a deu du-hont gant ar ru,
Pignet war eun hinkane du,
Hag hen d'an daoulam war ar g
Ken a strink an tân deuz ar vein

(1) Remengol, hanvet gwechal Ru-Men-Goulou, da lavaret Men-Ru-ar-Goulou, ab lamour ma voa eno eur men ru, eun templ konsakret da c'houliou de, enoret evel e Doue, dindan ann hano a Deutatès, Doue-Tad. Ar Roue Gralon, goude beza diskar ann templ-se, ha savet enn e blas eun ilis kaer da Vam ar Gwir-Douè chenches har payen Ru-Men-Goulou, enn hano kristen a Remengol, da lavaret e Remed-Oll deus behini ar batronez a zo hanveet ann Itron-Varia-Remed-Oll. Notre-Dame de to Remède, abalamour d'ar burzudou bras a ra bemdez eno ar Verc'héz : abaoe amz ar Roue Gralon betek hirio.

Eno zo c'hoaz induljansou ar re vrassa roet gant hon Tad santel ar Pab dan c'gvistenien a-deu da Remengol da bedi a galon, Patrones Breiz-Izel. Dre eur sk

az d'ann daoulin evit hag aliès e leveron dez-hi gant garante ha gant fians enn he galloud hag enn he madelez.
bugel koant a fur, Sant O Gwerc'hez sakr Remengol, Patronez Breiz-Izel,
Pedit evidomp, hirio ha pa rankimp mervel :
Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet
O deus ho karet, ha kar hag ho karo bepret.



Chomet e unan er palès,
A dosteaz da gaout Ahès.
— « Va dousik koant, merc'h da [C'hralon]
« Ha muia karet va c'halon,
« Ha n'elfent me eneh gis
« Guelet alc'houe sklujou Kear Is ».
— « Va zad a zoug enn e gerc'hen
« Ann alc'houe aour deuz eur chaden
« Ha va zad bremen zo kousket,
« Ha kaout an alc'houe n'allan ket.
Mes hen d'he zreid en em strinkas
Ha d'he bornik flour a bokaz,
Hag e dallas dre he zellou,
Karget a dàn hag a zaëlou.

IV

Heb goud ar pez a dremene,
Neuze eur pennad ac hane,
ENN e baled ar Roue koz,
E voa kousket e kreiz ann noz.
Kambr paour Gralon ne voa enn-hi
Nétra nemet eur grussifi
Deuet a zorn eur mignon ker,
Sant Kaourintin, Eskop Kemper.
Netra nemet eun Aviel,
Roët gant eur manac'h zantel,
Roët dez-hai gant Gwenole,
Evel eur merk a garante.
Kaér enn e gozni vel eun Ael,
E kouske Roue Breiz-Izel.
Hag enn dro d'he dall, e vleo gwen,
A re dispak, eur gurune.
Neuze, Ahès, ar brinsez fall,
Evel pa vije skoët dall,
ENN e gambr, heb aon rag Doue.
A deu da laëres an alc'houe.
ENN eur vale war beg e zroad,
Ar verc'h a dosta skan d'he zad,
A goustadik deuz e gerc'hen,
A denn n'eur c'hoarzin, ar chaden.

V

Piou a deu du-hont gant ar ru,
Pignet war eun hinkane du,
Hag hen d'an daoulam war ar gein
Ken a strink an tân deuz ar vein ?

Iou, da lavaret Men-Ru-ar-Goulou, abasakret da c'houlou de, enoret evel eun
Ar Roue Gralon, goude beza diskaret
da Vam ar Gwir-Doue chenchas han
nengol, da lavaret e Remed-Oll deus a
Varia-Remed-Oll. Notre-Dame de tout
emdez eno ar Ver'hez : abaoe amzer

gant hon Tad santel ar Pab dan oll
on, Patronez Breiz-Izel. Dre eur skrit

Hennes eo messajer Doue,
Digaset enn Is d'ar Roue,
Hennes eo Abostol ar Feiz,
Sant Gwenole, karet e Breiz.
Tostat'r'a en eur c'haloupad
En he zorn deo e vaz abad,
Hag eur stol aour war he zaë venn,
Hag eur c'helc'h tan en dro d'he Benn.
Setu hen e dor ar palès
E p'hini e kousk tad Ahès
Diwar e varc'h an den zantel,
A c'halv, en noz a vouez huel.
— « Gralon, Gralon, sao hep dale,
« Sao evit heuilla Gwenole,
« Sao evit tec'hel deuz ar mör,
« Sklujou kear Is a zo digor ! »
Hag ar Roue koz trubullet,
E mez e vele zo zaillet,
— « Din-me, din-me, va marc'h prima
« Siouas peurgollet ar ger-ma !... »
Ha war e varc'h e ber amzer
E kerz da heul e vignon ker,
Ha war o lerc'h, enn eur iudal,
E klevont ar mör o ruijal.
Neuze ar brinsez dirollei,
He amourouz gant-hi kollet,
Dre gear Is, a glei hag a zeo,
A rede dispaket e bleo.
Pa glevas daou lamp ar c'hezek
Araog ar mör e tiredek,
Dre al luc'het gant nec'hamant,
Hanveaz he zad hag ar zant.
— « Va zad ! va zad ! mar em c'harit,
« War o marc'h skan va c'homeric
Hag, he respont, an tad tener
A zo e verc'h war ann tailler.
Kerkent ar mör a vuanna,
Ha Gwenole en eur grena,
A gri : « Gralon, töl ann diaoul-ze
« Diwar dailler da hinkane !... »
Koulskoude c'hoas leun a ankreis,
Ann tad a zalc'h ar bec'herez,
Mey ar zant a ra zin ar groas
Hag a stok outi pen he vaz.
Kerkent, mestres an droug speret
A ruil er mör bras fuloret,
Hag e kleo tost ar Roue koz
Eur c'hoarzin skiltr e kreiz ann noz.

Apostolik roet e Rom, en ilis sant Per, kement beleg a lavar an ofern war an aoter-vras an Itron-Varia-Remengol, a denn a boanniou ar purgator eun en p'hini a da raktal d'ar barados.

An dregont a vis maë 1858, an Itron-Varia-Remengol, a zo bet kurunet gant eur gurunen aour ha perles, roet dez-hi gant hon Tad Santel ar Pab Pii Nao.

Remengol a zo bet a viskoas ar gaëra hag ar santella ilis a Vreiz-Izel ; enori a rer enn-hi darn euz ar groaz hag ar gurunen spen J. Ch. darn eus ar relegou ar Werc'hez, Santez Anna, (sant Joseph, ana Ebrestel, ann Doctoret eus ann ilis, Sant Breiz-Izel) ha relegou ouc'h penn daou vil sant all : hervez an dud koz, peb gwir Vreton a die, eur vech da viana, *beo pe varo*, ober pelerinach Rumengol.

Mes, rented skanvoc'h eb date
E sail prim da c'heul Gwenole,
Hag e varc'h, gleb e beder c'har
A lamp deus ar mor en douar.
Breman, ed e Mari-Morgan,
Ahès, deuz skeud al loar a gân,
A gân hag en eur vousc'hoarzin,
A grib er mör e bleo bezin.

VI

Da zao heol ar zant ha Gralon,
A bigne war leïn Mene-Hôm,
P'hini, he dreit ebars enn trez,
Zao e ben war Douarnenez.

Ac'hane Roue Breiz-Izel,
War e lerc'h a dolaz eur zel ;
Mez, el lec'h Is, gant he deg dor,
Ne velas mui nemet ar mör.

— « Eur gear em boa deus ar gaëra,
« Ha setu hi et da netra !... »
Hag e galon oll a fraillas,
Hag he zaoulagad a welas.

— Gralon, Gralon, me Gwelone,
— Gralon, d'an daoulin ganen me,
Ha Gralon dindan e c'hlac'har,
A goë d'ann daoulin d'ann douar.
Hag eno, dispak e vleo gwenn,
Hag e dall pleget er boultron
E lavare c'hoas ar Roue :

— Ra vo gret bolonte Doue !...
Pa zavas diwar he zaoulin,
Dindan tân-flamm heol ar mintin,
A velas, a dreuz he zaëlou
E lugerni Ru-Men-Goulou.

Wär ar men-ze, hon tadou koz,
A skuill e goad d'eun Doue foz,
Hag ar Roue, e ber amzez,
A lavaraz d'he vignon ker :

— « Du-hont, e memor a gear Is,
« Me zavo d'ar feiz eun Ilis,
Rag evit testeni d'ann oll
M'he galvo ilis Remengol (1).

« Rag war dolen ru Deutatès
« Me lakaf da ren ar Werc'hez,
« Ha beb bloas. enn enor d'ar groas,
« E rin ober eur pardon braz.

« Eno, ann oll dud afflijet,
« A gavo d'ho foanniou remed,
« A silvidiger d'ho ene,
« Dre c'hraz Mari gwir vamm Doue.

« Pa vo ann Doueou maro,
« Ha koët meur a goat dero,
« Eun de, deuz ar pevar avel,
« E teuio d'hi pobl Breiz-Izel.

Neuze ma ve sonj a Gralon,
E vo lavaret a galon :
— « Brasa burzudou a zo bet
« Ebars enn amzer dremenet !... »